

Guerzen er stér Ellé ⁽¹⁾

Me hanù e zou er stér Ellé Gañnet on
 é lanneu Plouré D'en noz pe vé kloar en am-
 zér En Ellé du-hont e gleu - ér D'en noz pe
 vé kloar en am - zér En Ellé du-hont e gleu - ér.

1

Me hanù e zou er stér *Ellé* ;
 Gañnet on é lanneu Plouré ;
 D'en noz pe vé kloar en amzér } bis
 En Ellé duhont e gleuér.

2

Ia, Elled e gañ ar un dro
 Barh er hornad hont ag er Vro,
 Hag ou hanù kaer e gemerañ
 Rak a zuhont d'er mor é tañ.

3

Oèdet bras é er stér Ellé,
 Més hi zou hoah lañ a vuhé ;
 Ker koh on él er gér a ls ;
 Chonj mat em és a Sant Moris.

4

Moris abad é Langonnet
 Epad tregont vlé e zou bet,
 Hag arlerh Moris é vredér
 E bedas ino pél amzér.

5

Guélet em és ur gourén fal
 Etré Loeiz-er-Hunff, (Débonnaire)
 roué Bro Gal
 Ha Morvan komt bro er Léon ;
 Arfleuet e oé ou haloñ. (2)

6

Lahet é bet barh en emgan
 Me mignon kaer, er homt Morvan ;
 Ouilet en dés men deulagad
 A pe goéhas me héh Breihad.

7

Étré Kerné ha bro Guénéed
 Me vercher viuen (Limite) eit berpet,
 Mes Kernehad d'er Guénéedour
 N'é ket red ma vou énebour.

8

Arlerh Prijak ha Langonnet
 Me gav ar me hent er Fañet ;
 Bep plé a pe arriù en hañ
 Me huél pardon Santés Barbañ.

9

Ar me ribl ur gér zou sañet
 Ha me hanù hi dés keméret,
 Rak a Gemper hag a Ellé
 E ma deit er gir Kemperlé.

10

A Gemperlé bet er Pouldu
Léta (3) on, eurus a bep tu ;
 Neoah idañ me hanù neué
 Me zou berpet er stér Ellé.

(1) Er huerzen-men ne gonz ket ag en Drivet Urh. Ni hé lak elkent ar er villetten, rak mé ma grocit dré un eutru hag e gar bras S. Franséz hag en drivet Urh, hag eué rak ma kredamb é vou lénet get plijadur.

(2) En emgan-sé en dés hum hroeit ér blé 818 ar un dorgen galuët *Menez-Morvan*, ar ribl déheu en Ellé.

(3) Er gir *Léta* e senefi *joéius* ;

11
Me dremen tost d'en Arhenneu
Kañnet get Brizeg é guerzeu.
Ha pradeu Guidel e hlubañ
Kent kas men deur d'er mor ledañ.

12
Eit ma torreint nan ha séhed
Me ra d'en dud deur ha pesked,
Hag ur bern a rodeu mélin
E lakañ de droein bep mitin.

13
Mannéieu nueh ha didalvé
E droh d'ein en hent hamb truhé ;
Ne fal ket d'ein get hé gourén ;
Me glask en dro hag e dremen.

14
Ar hou hent, o me mignonnet,
Sparleu liés e gaveet ;
Ne gannet ket get hé a-dal
Avel ma hrehé er chetal.

15
Hui glaskou en dro, el tud fur.
Ha n'hou pou ket displijadur ;
Paud a dud en des hum gollet
En ur glah dré nerh tremén dret.

16
Ag en Néan pe goéh ré er glàù
Ar men deu ribl men deur e saù,
Me lak paud a dreu d'en hum gol,
Forth hanval on doh un dén fol.

17
Mes ind e hra brasoh foleh
Er ré hum daul d'er véùereh,
Rak ind e hra geu d'ou iéhed,
Droug d'ou zud ha d'ou mignonned.

18
Ur méùour doh ur loñ bretal
D'er liésan e zou hanval,
Rak ér vouteill en dés skarhet
Éan e lausk é rézon béet.

19
Éndro d'ein me huél peb sort treu,
Lanneüier, rehiér ha parkeu,
Tud iouank, tud koh, bugalé,
Menéh, béleion ha groagé.

20
Er venéh zou er ré finan,
Get deur ur stér ind e hra tañ,
Tañ guéh melén, guéh aral ru ;
Ne lausk na moged na ludu.

21
Ind e hra tañ get deur ur stér,
Gobér e hrant eué sklerdér.
Sklerdér aveit en Abati,
Ha sklerdér aveit Kermengi. (1)

22
Étré Pouldu ha Kemperlé
Ur houvant aral hum gavé ;
Hanùet e oé Karnoët ;
Moris en doé éan saùet.

23
Tud iouank ha bugalégu
Ar me ribl e hoari d'er ieu ;
Hoari e hrant eué d'er sul
Sel guéh ma plij get ou bugul.

24
É Kemperlé me huél gobér,
Get pillot ha get lann papér,
Papér guen aveit lihérieu,
Papér aveit kévelenneu (journaux).

25
Lun er Pantekoust d'en Toul Fouen
Tud amoèd e rid a vanden ;
Labourér doar ha kériad
E za de glah ino imbad.

26
Ar en termén-sé ag er blé
En dud fur e dosta de Zoué ;
Ind e gav get er Spered Glañ
Joé ha sklerdér eit ou inéan.

27
Goudé hi dout riblet (côtoyé) Prijak
Er stér en Aer genein hum lak,
Dont e hra a du er Hroisti,
Kalz a zeur e zegas get hi ;

28
Me hoér Izol é Kemperlé
E ra d'ein dorn get karanté ;
Aveit dougein listri ponnér,
N'en dé ket ré a zeur tèt stér.

29
Ha hui, o me heh mignonned,
Hui tud mem bro, hui Bretonned,
Pegours é veet-hui eué
A-du en eil get égilé ?

Er. B...

(1) Hanù koh Sant Mikél.